




14 - Gwerz : Al lanneg vras (Traditionnel)

Cette gwerz a été apprise auprès de la famille BERTHOU de Peumerit-Quintin. Elle était chantée par la mère d'Yvonne.



AL LANNEG VRAS**La grande lande**

El lanneg vras war lein ar menez
 Gwaremm an ivin hag an oulm
 E-touez an avel hag an arnev
 E kornig ma lochern golo
 Met enni, ma zud kaezh, war ur gwele kalet
 A strinkas ma c'halon o tont war ar bed
 Enni me a zo bet ganet
 Luskellet ha maget

Ne oan ker c'hoazh nemet ur bugel
 E vijen kaset da vësaat
 Ur vuioç'h laezh, ur c'havr ha daou zañvad
 A oa d'am zud o holl beadra
 Met enni, ma zud kaezh, war ur gwele kalet
 E strinkas ma c'halon o tont war ar bed
 Enni me a zo bet ganet
 Badezet ha maget

Me am eus soñj mat, pa oan-me bihan
 Me am eus bet alies tomm ha yen
 Gwisket fall, divotou, diskabell
 E ranken mont en-dro evel pep den
 Met enni, ma zud kaezh, e-touez ma loened
 Me a veve disoursi ha pell deus trouz ar bed
 Eñrusoc'h e gwirionez
 Evit meur a roue

*Dans la grande lande en haut de la colline
 Paradis de l'if et de l'orme
 Exposée au vent et à l'orage
 Au coin de ma chaumière
 Mais c'est là, mes amis, sur un lit très dur
 Que battit mon cœur quand je vins au monde
 C'est là que je naquis
 Fut bercé et élevé*

*Je n'étais encore qu'un enfant
 Qu'on m'envoyait garder les bêtes
 Une vache, une chèvre et deux moutons
 Étaient les seuls biens de mes parents
 Mais c'est là, mes amis, sur un lit très dur
 Que battit mon cœur quand je vins au monde
 C'est là que je naquis
 Fut baptisé et élevé*

*Je me souviens bien quand j'étais petit
 D'avoir eu souvent chaud et froid
 Mal vêtu, les pieds nus, nue tête
 Il me fallait aller comme tout le monde
 Mais là, mes amis, parmi les animaux
 Je vivais sans souci, loin des malheurs du monde
 Plus heureux en vérité
 Qu'un roi*

War al lann-se ne ziwán netra
 Met kanab, segal hag ed-du
 Tamm lann brezhonek ha raden
 Ha mouar ha drez ha brug ruz
 Met enni, ma zud kaezh, e-touez ma loened
 Me a veve disoursi ha pell deus trouz ar bed
 Ne oa ket evidon er bed-mañ
 Tammig muioc'h eürusted

Dre ma saven bras hag an oad din
 Em eus bet alies soubennoù al laezh
 Me am eus kanet rimpousdennoù
 Ha lakaet gouel ha c'hoarzh alies
 Met biskoazh ur vro n'he deus me tommet
 Evel al lannig-se, e-barzh al lec'h ma oan ganet
 Enni e savo korf hag ene
 Gant bleuñv koant ar menez

Neuze bremañ pa vin-me galvet
 Mont e-lec'h eo aet hon tadoù kozh
 Me a gred, ma Doue, bout douaret
 Er vered vihan eus ma farrez
 En ul lec'h e klevin ar c'hleier er ball
 Hag an talabarder o son da zañsal
 Hag an holl vouezhioù karet
 Deus ma bro vinniget

*Sur cette lande ne poussait
 Que du chanvre, du seigle et du sarrasin
 Des ajoncs et de la fougère
 Des mures, des ronces et de la bruyère
 Mais là, mes amis, parmi les animaux
 Je vivais sans souci, loin des malheurs du monde
 Il n'y avait pas dans ce monde
 Plus heureux que moi*

*En grandissant
 J'ai mangé souvent de la soupe au lait
 J'ai chanté des comptines
 Fait rire et pleurer
 Mais jamais aucun pays ne m'a réchauffé
 Comme cette lande où je suis né
 Là s'élèvent le corps et l'âme
 Avec les fleurs magnifiques des collines*

*Maintenant quand je serai appelé
 Pour aller rejoindre mes ancêtres
 J'implore Dieu d'être enterré
 Dans le petit cimetière de ma paroisse
 Là où j'entendrai les cloches
 Et le talabardeur sonnant pour danser
 Et toutes les voix chéries
 De mon pays béni*